

D'an 19 a viz Even 2012 e oa. Aïcha D. he doa digoret afer dirak lez-varn Aix-en-Provence. Dispartiet e oa diouzh he gwaz ha fellout a rae dezhi cheñch anv he bugale. « Da reiñ ul lañs gwelloc'h d'o buhez, » emezi. Goulenn a rae e ve cheñchet anv he merc'h, Fatima, e Nadia hag he mab, Mohamed, e... Kevin (!)

1187 km alehont e oa bet enskrivet div blac'hig er skol S. e T. Keridwenn Martin, merc'h da Aurélien Martin ha Lucie Khachkouche na oa bet morse distripet an disterañ ger brezhoneg gant o zud. Ha Kimberley Morvan, bet ganet e T., bet ganet he zud, he zud-kozh, he zud-kuñv, he zud-you e T. ha brezhoneg gant an holl mar plij.

Da choaz e oa etre ar c'hlas gallek hag ar c'hlas brezhonek...

... Ha morse n'em boa gwelet Kimberley.

* *

*

Kimberley : (*h*) Tok drol a vez implijet gant tud zo da guzhat penn, divskouarn, anv, gwrizioù o bugale. *Gerioù heñvelster :* Kevin, Jason, Britney, Pamela...

1.

E-barzh ar c'hlas edo poltred Anjela Duval ouzh ar voger. Tomm e oa an amzer ha dilhad skañv gant an dud. Hañv a oa e pep lec'h paneve e klas Josiane. Josiane hag Anjela a oa doare ar goañv ganto.

« Anjela zo kaoz em eus desket brezhoneg, eme Josiane. Div wech on bet o welet anezhi e Traoñ an Dour. Ur bam. Paneve Anjela... »

E-barzh klas Alan edo poltred Per-Jakez Hélias abalamour edo tad-kozh Alan deus Pouldreuzig hag un tammig anaoudegezh en doa gant P. J. Hélias. E-barzh klas va c'helenner galleg er skolaj edo poltred Jacques Brel abalamour en doa gwelet anezhañ ur wech p'edo krennard. Ha bep bloaz e rankemp lonkañ kanaouennoù “Jakez Bras”. Me ne oan bet o welet den ebet, nag e Traoñ an Dour, nag e Pouldreuzig, nag e lec'h all. Setu ne oa poltred ebet en va c'hlas din-me. D'ar 4 a viz Gouere 2012 e oa. Edo Josiane o vont war he leve hag e oan mestr nevez an dachenn.

— Ha laosker a ri poltred Anjela ?

— Anat dit.

Spontus e oa ar poltred-se. Kement a boltriji kaer meurbet a oa bet tennet deus Anjela Duval. Perak an diaoul he doa lakaet hemañ ? Ur paotrig en doa bet aon ha leñvañ en doa graet abalamour d’ar... “sorserez”. Tennet em boa ar skritell diouzh ar voger ha desket *Ar minimadoberoù* d’ar vugale. Da gentañ em boa soñjet e vije sachet a-du Anjela Duval ganin. Gwelloc’h deskiñ ur ger brezhoneg dezho eget diskouez ur c’hozh poltred. Da eil em boa soñjet ne raen ket foutre-kaer.

Hag Anjela Duval nebeutoc’h c’hoazh moarvat...

Evet hor boa chistr, debriñ kouignoù sall, selaou pennad-kaoz ar renerez, hini ar prezidant, ur ganaouenn (e galleg !?) savet eviti gant he skolidi vrezhonek. Leñvañ. Ur wech draillhet ar serviedennoù paper diwezhañ gant ar vugale ha lipet ar chistr dek gweneg ganeomp e oa dleet deomp mont.

Ne oa ket bet gwashoc’h eget laosker anezhi war un tamm skorn e-giz un inuitez kozh didalvez.

* *

*

Anjela Duval : (*h*) Gouloù lutig evit mont war-raok dindan glav puilh ar galleg.

2.

Ne oa ket un afer kousked (n'em boa ket kousket). Enkreiz ne lavaran ket... Ne oa nemet an eil bloavezh din er skol-se ha din-me e oa da entent deus klas ar re vihan diwar-neuze. N'oa ket abalamour e oan rener ar skol ha ret disammañ ac'hanon da gas "labourioù pouezusoc'h" da benn. Ne oan ket rener. N'oa ket abalamour e oan en em gavet da ziwezhañ ha ne felle da zen all ebet entent deus ar re vihan. Me am boa goulennet klas ar re vihan.

E-barzh ar skol e oa klasoù gallek ha klasoù brezhonek. D'ober skol ganin e veze Herveline (a felle dezhi bezañ anvet "Line") ha Sonia a bep eil. E klas re ar CM1 hag ar CM2 edo Bernez oc'h ober skol, e klas re ar CE1 hag ar CE2 edo Vanessa oc'h ober skol, e klas ar re vras ha re ar CP edo Julia oc'h ober skol, e klas ar re grenn hag ar re vras he dije ranket Sophie ober skol paneve ar goañvezh hir a oa bet, ar riv hag an tredan a oa bet troc'het. Un nozvezh hir a oa bet, nav miz a-raok, ha traoù nevez a oa gant Sophie. E klas ar re grenn hag ar re vras edo Alan oc'h ober skol da c'hortoz e teuje Sophie en-dro. Ne oa nemet un hanter bost evit ar c'hlas-se. An dervezh kent e oa bet lavaret deomp ne oa ket bet moaien da lakaat ar rener meur da cheñch meno war ar poent-se. Gouzout a raemp ne oa ket bet klasket.

Digoret em boa an nor. Ne greden ket. An dervezh kent en doa lavaret Bernez din taoler evezh na vije ket desket brezhoneg kamm gant ar re vihan rak dibosupl 'vije cheñch an dra-se da c'houde. Komprenet em boa e oa kamm va brezhoneg. Digoret em boa an nor memestra.

— Erwan eo va anv. Mont a ra mat ?

Goulennet he doa Keridwenn diouzhtu ha bugale am boa er gêr.

— Daou vugel am eus emeve, ur paotr hag ur plac'h.

Aze e vije bet brav lavaret ur c'hrenn-lavar e-giz « Merc'h ha mab, atav e pad. Mab ha merc'h, netra war-lerc'h ». N'em boa ket graet avat. Ne gomprenan ket perak e rankjen lavaret krenn-lavarioù koustet a gousto. Kement ha reiñ blaz d'an traoù ? Daoust ha n'on ket “tipik” a-walc'h ha ret 'vije din dañsal ar gavotenn a-raok digeriñ kaoz ouzhpenn ?

— Mont a ra mat ganez Pierre ?

Diaes e oa bet lakaet. Desket-mat e oa bet e gentel gantañ a-raok dont da skol (ret eo saludiñ ar mestr). Kredet en doa lavaret...

— Bonjour...

Respontet em boa :

— Mat ar jeu !

Dipitet e oa bet met ne oa ket padet.

Da c'houde e oa deuet Morganenn er c'hlas. Blev rous, daoulagad gwer dezhi, ul lostenn verr ganti (dibenn

an hañv). Diskregiñ diouzh dorn he mamm he doa graet, sellet ouzhin ha leñvañ. Clément, blev melen, lunedoù ruz war e benn, sandalennoù lêr en e dreid (an hañv atav), leñvañ, yudal, tufañ war al leur ha tufañ warnon en doa graet. Deuet e oa Léa ha Clara er c’hlas, gevellezed heñvel-mik o-div. Mousc’hoarzhin o doa graet ouzhin ha bec’h d’ar c’hoarielloù. Deuet e oa Ivan er c’hlas (dre heg rak mort edo kroget e bragez e dad) ur stammenn ha botoù ski gantañ (?). Ne oa ket an hañv e Rumeau ken, daou gilometr deus ar bourk. Rechetiñ, staotaat, kac’haat en doa graet.

Un eur da c’houde edomp pemp warn-ugent er c’hlas. Unnek diouto o leñvañ druz. Staot, dislonk, kreionoù distouf, paper war al leur. Traezh e daoulagad Baptiste, gwad war fri Pierre a oa bet torret gant Logan, liv war dremm Julie. Flaer gant an holl. Den ne rae foutre-kaer gant va brezhoneg kamm.

3.

Da zek eur ha kard e oa din-me da entent deus ar vugale war ar porzh. Kroget mort e oa Baptiste en va gar. Kavout a rae dezhañ e oan ur wezenn ha ne ouie ket n'em boa gwrizienn ebet. O leñvañ edo Charlène ha kinnig a rae mougañ bep an amzer. Fiziet e oa bet ennon gant Soaz pa ne c'helle ket anduriñ anezhi ken.

Banne kafe, va banne kafe, he doa lavaret Soaz dezhi.

Plijout a rae da Soaz distripañ an tammig brezhoneg a chome ganti. Charlène na gomprenne ket, ne gomprenne seurt ebet hervez Soaz ha koulz e vije bet dezhi mont er c'hlas brezhonek war he meno... Kroget e oa brav an traoù.

Lakaet he doa dorn ar plac'hig en va hini ha kas sellou du outi. Ar c'hwec'hvet bloavezh ha tregont a oa da Soaz dont d'ar skol. Gouzout a rae diouzh ar vicher. Arabat plegañ, arabat mont re vuan, arabat ober biloù. Gouzout a rae e oa meur a vugel e pep hini anezho, gouzout a rae n'oa ket da gaout aon rak an enseller stad, gouzout a rae entent deus ur c'hlasad pemp bugel ha tregont, diskoachañ ar re o dije poan gant ar skol, ar re o dije ezhomm da gaout lunedoù, an danvez otisted.

Gouzout a rae e chome 48 hanter-devezh alese d'ar vakañsoù kentañ.

